

Chanson
En' honor d'ar Roue ha d'ay Nasion.

(238)

Var tñy ay Trivac'h Planeden.

M'am bize ar pouvoar en devoa Ciceron,
Ha gement a furnes vel ar fur Salomon,
Me lagafe va speret da ober ur Chanson
En' honor d'ar Roue ha gloar ay Nasion.

Cavet zo ur sujet da ober ur chanson
Var ar rêglamanchou grêt gant ay Nasion;
An oll jeneralamant a vo rejouiset
Partout ebars en Frans, en amzer da zonet.

Me o ped, Fransizien, n'en em dezolit get,
Ar pezh zo comanset a vezo achuet;
Pedomp Doue a galon, hag e vam benig'et,
Ma vo acompliset ar pezh zo prometet.

Pa voue crouet ay Den dre zorn Doue ay Tad,
E voemp formet ingal, ay oll er goar erfet;
Ha setu ze bremañ evel en amzer ze,
N'eus get a breferans d'ay eil mui d'egile.

(239)

N'en deus get pel e voamp oll partout acablet,
Gant cals eus a groajou zo bet aboliset:
Guelet a reomp dija ar preuz a g'ement-se,
Ma fel d'hoñ Tad Louis rei d'e bobl liberte.

Viv eur Roue qer mad, leun a zantimanchou,
Er stadou - General e selaou hor c'homzou;
Discaret en deveus ay oll ambition
A voa ebars en Frans dre ur quir drakizon.

Ha pa velas ar bobl serten ar garante
Demeus hoñ Tad Louis evit e vugale,
Gant solanité vras ha venerasion
E voa bet curunet dre dorn ay Nasion.

(240)

Pebes rejouisans a zo bet en Paris!
 Partout ebar en Frans en honor da Louis!
 An tan a jom zo c'huezet, cals a illamuneron
 A zo bet ellumet dre ar ruyou.

Pa velas ar Roue bravour ar Fransizien,
 E gemeras neuze ractal ar gocarden,
 Erit rei da zisquez d'an oll e general,
 E voamp ingaliget ha tout nasional.

Racse ta, Fransizien, dougomp ar gocarden,
 Gant quir humilité ha respet souverain,
 Da zisquez ez omp leun eus a fidelité,
 Prest da scuilla hor goad da zouten ar Roue.

(241) Mëriou, Electoret, ha c'houi, Deputerien,
 Munisipaliteou, c'houi oll ofiserien,
 C'houi zo lagët en carg, dre vouez an Nasion,
 Gras deo'h d'ober erfad en oll perfection.

Ha c'houi, hor Bêleyen, mar deo quir or c'heret,
 Na barlantet ta mui enep hor Deputeet;
 Dezo ha d'or Roue ezomp obliget mat;
 Dezo eo da ober al lezen en etat.

N'omp get erit credi, evel ma leveret,
 O deus er Religion grët chenchamant ebet;
 N'omp get erit credi eve deus ar Roue.
 Naig hor Deputeet da risqa ho ene.

Eleis a dud disqet a bep condition,
 A reseo al lezel [sic; lire: lezen] eus a greis o c'halon,
 Oc'hpen ug'ent mil Bêlez o deus prestet o le,
 Ha c'houi, gant gras Roue, soudan a reio ive.

(242) Mar deus da rebeli enep an Nasion,
 Var an digarez fos eus ar religion,
 E vezimp obliget, enep d'hor c'harante,
 Da choas Bêleyen all o deus prestet o le.